



15 - Dañs Leon : Ar bambocher (Traditionnel)

AR BAMBOCHER

Le noceur

Gwechall ec'h aen e gwetur d'ar foarioù, d'ar marc'had
Gwisket evel un aotrou, dre ma oan peizant mat

Ken fonnus hag an avel me ec'h aen gant an hentoù
Gant arc'hant o trouzellañ e-barzh foñs ma godelloù

Ha neuze, me ac'h ae ivez, o ya, d'ar marc'hadoù
Hag e even gwinn ha gwinn ardent, kafe ha likorioù

E-barzh kalz ostalerioù, me am beze da dremen
E-barzh enne tout, me a ziskenne evit glebiñ ma
lañchenn

Pa vezen gwelet oc'h erruout, kredit, ma mignoned
An ostiz, an ostizez ne vezent ket kousket

O-daou e teuent asambles evit ma saludiñ
En ur lavaret din : Antreal e-barzh an ti eta, Pipi

Da gemer un banne rom pe ur banne kafe
Ya, rak tommoc'h e vo dit, fresk eo ar beure

A-raok monet eus ar gêr, ma forn a veze tomm
Ha ne zeue ket da yenañ gant kafe du ha rom

Ha ma gwregig koulz ha me, na pa gave an tu
A evel rom ha gwinn-ardant, kognak ha kafe du

D'an daou benn d'ar c'houlaoenn pa vez krog
mat an tan
E vez devet e berr amzer, ne chomer ket pell hep poan

*Autrefois j'allais en voiture aux foires, au marché
Vêtu comme un seigneur, puisque j'étais un paysan aisé*

*J'allais aussi vite que le vent par les chemins
Avec de l'argent qui tintait au fond de mes poches*

*Et j'allais donc aussi aux marchés
Et je buvais du vin et de l'eau de vie, du café et des
liqueurs*

*Moi, j'avais l'habitude de passer par beaucoup de cafés
Je descendais dans tous pour m'humecter le gosier*

*Quando on me voyait arriver, croyez-le, mes amis
L'hôte et l'hôtesse ne dormaient pas*

*Ils venaient ensemble tous les deux me saluer
Et me disaient : Entre donc dans la maison, Pipi*

*Prendre un verre de rhum ou une tasse de café
Oui, car tu auras plus chaud, il fait frais ce matin*

*Avant de partir, j'étais saoul
Et je ne dessoulais pas avec le café noir et le rhum*

*Et ma petite femme, tout comme moi, quand elle pouvait
Buvait du rhum et de l'eau de vie, du cognac et du
café noir*

*Quando on brûle la chandelle par les deux bouts
Elle est vite consumée, on ne reste pas longtemps
sans douleur*